

72 - An intañv - Le veuf (II)

Adèle BUGELOU, Sint-Ijo (Saint-Igeaux) 1973



Dek gwech de - me - 'et eh on bet, Dek gwech de - me - 'et eh on bet,

Dek gwech de - me - 'et eh on bet, Ha dek gwech in - tañv 'h on cho - met.

Dek gwech deme'et eh on bet (*ter*)
Ha dek gwech intañv 'h on chomet.

I tapo plouz da c'hwezho 'n tan
'Varvas da gentañ Mari-Janne.

I hont d'ar c'hraou da c'horat bi'
'Varvas un all hag a rê di'.

'Evo kafe gant he c'homer
'Varvas un all hag a rê teir.

Gant ur c'hofad krampouezh lardet
A oe maro ar boder'et.

'Hont da lakat 'zoubenn 'trempe
'Varvas un all hag a rê pemp.

'Hont d'ar park da droc'ho kerc'h
'Varvas un all hag a rê c'hwec'h.

'Hont d'ar c'hraou da skarzho teil
'Varvas un all hag a rê seizh.

Gant un droug bou'elloù diremed
A oe maro an eizh'ed.

Gant un c'hofad fi'ez fô (1)
'Varvas un all hag a rê nô.

'Hont d'ar gwele beg deus beg
'Varvas un all hag a rê dek.

J'ai été marié dix fois (*ter*)
Et dix fois veuf je suis resté.

En prenant de la paille pour allumer le feu
Mourut d'abord Marie-Jeanne.

En allant à l'étable pour traire les vaches
Mourut une autre, ce qui faisait deux.

Buvant du café avec sa commère
Mourut une autre, ce qui faisait trois.

D'une ventrée de crêpes beurrées
Était morte la quatrième.

En allant tremper la soupe
Mourut une autre, ce qui faisait cinq.

En allant au champ couper de l'avoine
Mourut une autre, ce qui faisait six.

En allant à l'étable pour sortir le fumier
Mourut une autre, ce qui faisait sept.

D'un mal de ventre sans remède
Était morte la huitième.

D'une ventrée de fâines
Mourut une autre, ce qui faisait neuf.

En allant au lit, bouche contre bouche
Mourut une autre, ce qui faisait dix.

(1) fi'ez fô = figez fao = mot à mot : *des figues de hêtre (= des fâines)*.